



# Itron Varia Vulat

---

I

## Gwerz Iliz Bulat

DISKAN

Gwerc'hez Bulat, Itron Vari,  
Harzet pep droug d'hon glac'hari,  
Reit d'imp bennoz, reit d'imp zouten,  
Miret n'hon zouez ar fe gristen!

Zalud, douar Pestivien, brudet en Breiz-Izel,  
Gant ho tud-jentil nerzus ha ter 'barz ar brezel,  
Zalud, dreist-holl da Vulat, brudet gant burzudou.  
Gant burzudou ar Werc'hez e kenver hon zadou.

Tostik-tost da vourg Bulat, e weler 'n eur braden,  
Eun dosenn warni brouskoad kelvez, brug ha raden,  
Eno e oa eur c'hastell ar c'haëran diouz ar vro,  
Gant koajou braz en peb tu, hag eul lenn tro war dro,

Tud-jentil vat ha zantel er c'hastell-ze ken kaer  
A zigemeras 'liez zant Erwan Landreger;  
An Otrou Yann Bestivien oa hano ar baron,  
An Itron Constans Rostren oa hano an Itron.

Med arôk-he, pell araok, eur baron diouz o gwad  
Na nevoa bugel ebet, hag hen aet war an oad,  
Hag a westlas d'ar Werc'hez mar nije eur bugel.  
A westlas, war e zouar zevel d'ei eur chapel.

Neb en em westl d'ar Werc'hez, na ra ket en-aner,  
A-benn eur blâvez goude oa mabig er maner,  
Ha zavet prim eur chapel ha hanvet Bugelat,  
Aboue neuze ve lâret : Itron Varia Bulat.

Ha da Vulat e teue kalz a belerined,  
Diouz Landreger ha Leon, diouz Kerne ha Gwened,  
Hag ar chapel re vihan n'em gavaz arôk pell,  
Ha setu graet eun iliz elec'h oa ar chapel.

Bennoz Doue da viken war hano an dud vat  
A zavas iliz Bulat d'ober d'ar fe krenvat;  
Bennoz Doue war hano baroned Pestivien,  
War hano beskont Rohan ha baroned Rostren.

D'an Otrone Pont 'N Abbad, Boutteville, Kergorle,  
Bennoz ive zo dleet d'an eil ha d'egile,  
Bennoz d'otrone Molac, ar Chapel, Kerveno,  
Markiz ar Gaj ha Kerouartz, bennoz war o hano.

Goude, daou vestr masoner hag a gare Mari  
A zavas diouz an iliz tour ha sekreteri;  
P'o deus roet d'ar Werc'hez o foan hag o danve,  
D'an daou yasoner zantel, bennoz, bennoz ive.

War an tour kaer graet gante, zo bréman eur zezen,  
Ebarz an êr zavet koant, 'vel eun dantelezen,  
Dreist da veneou Kerne he beg a zo uhel,  
'Vit kement-se trugare d'an Otrou Daniel.

Zalud, douar Pestivien, brudet en Breiz-Izel  
Gant ho tud-jentil nerzuz ha têt 'barz ar brezel;  
Zalud dreist-holl da Vulat brudet gant burzudou.  
Gant burzudou ar Werc'hez e kenver hon zadou.

## II

### Burzudou Gwerc'hez Bulat

Stank e ve 'barz an oablen ar stered d'ar mare,  
Stank ive war an douar gliz an Env d'ar beure,  
Ken stank all ar burzudou graet gant Gwerc'hez Bulat,  
Evit zikour an dud kaez hag evit o gwellât.

Diouz peb droug ha peb klenved eo bet deut d'o diwall;  
Diouz ar mor hag an avel, an dour hag an tan gwall  
Digant ar maro zoken, 'deus tennet meur 'hini;  
Mar n'e ket awalc'h lâret, me a rei testeni.

Galloud Mari aliez aman zo bet diskouet.  
Eur wreg diouz a vourg Bulat 'n eur puns don a oa kouet,  
Epad teir eur e chomas hep donet war goure.  
An holl' grede oa maro ha den n'he zikoure.

Mez gwestlet e d'ar Werc'hez ha kenkent e weler  
Korf ar wreg paour o sevel war goure an dour skler;  
Hag ermêz a oa tennet yac'h ha leun a vue,  
Hag an holl a vouez uhel a veule Mamm Doue.

Eur bugel tost da Wengamp, 'n eur stank kavet maro,  
E oa e vamm glac'haret o krial war e dro;  
Gwerc'hez Bulat, emezi, reit buhe d'am bugel!...  
Setu ar bugel beo mad, biskoaz na oa bet gwell.

Gant eur c'hoz penn magoren kouet a bez-kaër war n'han,  
Eur bugel e oa lac'het en parouz Locarnan;  
E vamm da Werc'hez Bulat hen gwestlas gant fe vraz,  
Ha dirak kalz a destou, ar bugel advevas.

Kollet gantan ar gwelet, eur baillif a Geraez,  
A zeuas beteg Bulat da bedi ar Werc'hez;  
E zaoulagad a walc'has 'barz feunteuniou Mari.  
Ha raktal e zaoulagad skler mat o tigeri.

Goude ar burzud kaer-ze e kenver eun den dall  
'Kenver eun den dall ive setu eur burzud all :  
Eun den a barrouz Kerfien, ha da Vulat renet,  
E-unan, pare, d'ar gêr a zo bet retornet.

Dalc'het gant drouk izili, an Aotrou Lestaurec,  
Goude pemp miz, a grede na vije ken barrek,  
Barrek da gavet yec'hed, na barrek da zevel,  
Yac'het e gant ar Werc'hez 'dal m'e deut d'he gervel.

Eun Itron a Goat-Uhel pell-ze war he gwele,  
Nevoa 'bet kalz a louzou ha netra na dale;  
Met pedi reas Mari da derri he c'hlenved  
Ha neubed amzer goude an itron oa zavet.

Digant an Itron Vari he doa bet he goulenn;  
Evit he zrugarekât e oa graet eun dolen.  
Eun dolen war n'hi Mari, ha 'n he gwele dalc'het,  
An itron a Goat-Uhel o c'houlenn ar yec'hed.

Mari Depault hec'h hano, eur wreg diouz a Vulat  
E kreiz genel he bugel a zalc'he da fallât;  
Gwerc'hez, diboaniet ganac'h, he deuz roet d'ho ti  
Eur rod-heol kaër alaouret e-lec'h par an Osti.

Fant Lucas, a Bestivien, peurgollet he spered,  
Diouz an eil parrouz d'eben a c'haloup hag a red,  
Ken' ben ar fin e bet kouet, e bet kouet en eul lenn;  
Met, emez-hi : ar Werc'hez d'am zikour a welen!...

Mêz al lenn pa oa tennet, oa deut he zud gant-hi,  
Itron Vari, d'ho kwelet, aman beteg ho ti,  
Aman ve kavet ganac'h, holl kement a glasker;  
Ar plac'h foll, sioul he spered, a zizroas d'ar gêr.

Eur wreg a Zuault-Quelen, he doa bet eur c'holl bras,  
He c'halon oa glac'haret, he spered a droas;  
En Bulat dirag Mari ha dirag hec'h ôter,  
E kavas ive diboan, ha skiant ha douster.

En eur gêr a Blougonver, e oa tan ha moged;  
Profet ez eo da Vulat, ha set' an tan mouget.  
Koulz all, en Pempoul-Goelo, 'n eur bern ed krog tan flam,  
Ar plouz en dro zo dêvet, an toc'had 'zo divlamm.

Dom Loeiz ar Berr, a Gallag, war eul lestr mare'hadour,  
A ye da Rom, pa savas avel foll war an dour;  
Al lestr, teulet, disteulet, gant ar mor o lampat,  
Paneved zikour Mari n'ije ket gallet pad.

D'ar Werc'hez e oa gwestlet ha 'n eun tîl an avel  
Evel o senti ouz mestr, a zeuas da devel;  
Neuze an dremenidi, Loeiz ar Berr hag e re,  
Da Vari stereden vîr, a ganas trugare.

'N Ancien a Blougonver, ebarz ar Flandr' Izel,  
A 'n em westlas d'ar Werc'hez, pa oa kreiz ar brezel,  
Kant ha kant, ar zoudarded a gouee n' gichen,  
Eun all hag hen a chomas 'n o zav war an dachen.

Eun den a goste Keraez, 'n eur prosez dall, en skour,  
A bedas Gwerc'hez Bulat da zonet d'hen zikour,  
Goude, pa nevoa goneet, e teuas da Vulat,  
Hag evit prof d'ar Werc'hez, e roas e zilhad.

Eur gwas a Vaël-Pistien, tiet gant eun noter,  
Aman zeuas da bedi, stouet 'tal an ôter,  
Eur guitans en oa kollet, trawale'h d'hen glae'hari,  
An de warlerc'h he c'havas a drugare Mari.

En Bulat zo er vered, eur feunteun vraz ha kaër,  
A-benn kavout he farez, pell ha pell e klasker;  
Tro war dro d'hei zo zavet magoriou benerez;  
O skarza ar feunteun-ze, 'teu lèz d'ar vagerez.

Stank e ve 'barz an oablen ar stered d'ar mare,  
Stank ive war an douar, gliz an Env d'ar beure.  
Ken stank all ar burzudou graet gant Gwerc'hez Bulat,  
Evit zikour an dud kêz, hag evit o gwellat.

### III

## Kantik ha peden da Werc'hez Bulat

War don : Ar re unaned (Barzaz-Breiz)

War ar mor bras dianket, e kreiz an noz du-dall,  
Ha tro war-dro, an avel gant kounnar o yudal,  
An den a vor a grenva e fianz, e beden,  
Dirak han, 'kreiz an oabl-du, pa 'bar eur stereden.

Rak sur e, goude prestik, e teu sioul an avel  
Hag ar martolod neuze, a dreuz d'ar mor a wel  
E hent hag e sklerijen, d'ont beteg ar porz-mor,  
Hag e vag daoust d'ar gerreg, a 'n em gav gant an nor.

Ni 'zo ive dianket 'kreiz mor ar bed treitour,  
Hag en dro d'imp o krozal an avel hag an dour,  
Avel diwar an ifern ha dour don ar pec'hed,  
Du an oablen, du an noz, hon e'halon 'zo nec'het.

Met 'vel eur stereden gaër a-uz da Vreiz-Izel,  
Gwerc'hez Bulat venniget, e'houi bar dirag hon zell;  
D'hon zrei diwar ar pec'hed 'zo treitour hag a laz,  
Paret, paret da bep koulz, stereden ar mor glas.

Paret dirag ar bugel o sevel 'barz ar bed,  
Beteg aman, 'n e galon, ar pec'het n'e ket bet;  
Dalc'het e vue henvel ouz ar wazig d'ister  
A red sioul gant an draonien hag a ya pur d'ar ster.

Ar yaouankiz, da welet, 'zo kaër 'vel eur rozen,  
Met eun naër zo dindan-hi, kuzet mesk ar c'hilazen,  
Paret war an dud yaouank, paret splan 'barz an êr,  
Reit d'ê nerz ha sklerijen da ziwal diouz an naër.

D'an tad ha d'ar vamm gristen reit sklerijen ive,  
Ma savfont o bugale en tu gant ar gwir fe,  
Ma tiskfont d'e da genta karet Doue arvat,  
Beva gant urz ha furnez, ha rei d'an holl skouer vat.

Dre holl, eneb da Zoue, a zo hirie brezel,  
Paret, stereden Vulat, a-uz da Vreiz-Izel;  
Miret hon bro da Zoue, miret hon bro kristen,  
Ni ho ped a greiz kalon, selaouet hon feden.

Daoust d'an holl drouk-sperejou, en dro d'imp a 'n em zerr,  
Ni a dremeno divlamm, war mor bras an amzer,  
Renet ganae 'hu, Gwerc'hez, stereden vat, ha dous,  
Ken e tigoro 'vidomp, porz-mor ar baradouz.

Ar GALL, beleg.

Kalon dous a Vari bezet ma zilvidigez (300 devez a induljans).

IMPRIMATUR

Brioci, dic 30 jlii 1892.

M. LE PROVOST,  
Vic. Gén.

Pardon Itron Varia Vulat a ve ar zul kentan warlerc'h  
gouel ar Werc'hez miz gwengolo.